

# Unvaniezh Katoliked Frans

PARREZ

*Guimael*

## Kenvroad,

Unnek vodadeg katoliked a zo da yeza graet en eskopti, adaleg an 19 a viz Genver betek an 12 a C'houevrer.

Prezegerien brudet, lod eus ar vro, unan bennak eus a dro war dro, a gomzo er vodadegou-ze.

Katoliked ar barrez a zo laket o dervez d'ezo d'ar  
*Le 2 fevrier* *2 fevrier* *112 fevrier* *e St Urbain (Woblen)*  
da 1 eur (13 h.) ; da staga da ziwezata da 1 eur hanter  
(13 h. 30).

Deuit da selaou ar prezegennoù ha digasit ganeoc'h ho kerent hag ho mignoned. Hoc'h amzer nak ho poan ne vezint ket kollet.

Petra zo a nevez-ta ?

Feiz ! araok ma tigoro amzer ar votadeg, katoliked Frans a gav eo mat rei da anaout da gement hini en deus c'hoaz eun tamm lealded en e galon, ne fell mui d'ezo e ve graet lezennoù d'o gwaska, na beza laket da ober al lans e tu pe du, da zeiz ar votadeg.

Frankiz a c'houlennont. Ha nep-piou bennak en deus c'hoant diskouez eo gwirion e lealded en o c'henver a ranko rei e c'her e sikouro terri lezennoù 1901 ha 1904 a lamm digand ar relijiuzed o gwirioù :

- da veva asamblez e Frans ;
- da gaout en o hano o lod e douar Frans ;
- da ober skol da vugale Frans.

Den eun ha digabestr, c'houi a deuo ganeomp, hag hon sikouro da harpa hor goulennoù.

En hano Katoliked ar

*'hantoy*

*G. Guillovy e.e.t.*

*Le 2 fevrier  
ou 10h.  
reunion  
d'hommes*